

# Divizout gant ar Stad

A-benn ar fin e seblant ar gouarnamant bezañ prest, da vat ar wech-mañ, da aozañ ur genstrivadeg a-ratozh evit kelennerien ar skolioù divyezhek brezhoneg-galleg. Abaoe meur a vloaz e vez goulennet kement-mañ gant Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg, met en aner betek-henn.



Manifestet e oa bet alies dirak Rektordi Roazhon gant Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg

**e** deroù ar bloaz-mañ pa oa bet graet kinnigoù gant Ministr an Deskadurezh d'ar skolioù evel ar skolioù Diwan, e oa bet anv da grouiñ ur genstrivadeg diforc'h evit ezhommoù ar c'hlasoù-se. Un nebeud mizioù, ha meur a emvod, war-

lerc'h e weler ar Ministrerezh oc'h ober ar c'hinnigoù pleustrek kentañ evit se : ur c'hoñkour disheñvel a vefe evit kelennerien ar c'hlasoù divyezhek, ha div amproenn vrezhonek, unan dre skrid hag unan dre gomz, a vefe en hollad an amproennoù, ar re all o vezañ e galleg. Da Ziwan eo bet graet ar c'hinnigoù-se gant ar Ministrerezh, e framm an divizoù zo etre ar gevredigezh-se ha servijoù ar Ministrerezh evit tizhout ur statud nevez evit ar skolioù brezhonek. Met en emvod-se e oa ivez dileuridi eus Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg hag Euskariz eus Seaska hag e deroù miz Gouere e tlefe bezañ un emvod all, war se, gant servijoù ar Ministrerezh.

Evit a sell an divizoù hollek war statud ar skolioù e yezhoù lesanvet rannvroel, avat, ned a ket an traoù war-raok gwall vuan. Meur a wech eo bet embannet gant Ministrerezh an Deskadurezh e felle dezhañ disoc'hañ gant un emglev a-raok an hañv. Dister ha gorrek eo bet kinnigoù ar Ministrerezh avat ken na greder ket e vo tizhet emglev hollek ebet diouzhtu, ha paouezet o deus ar skolioù divyezhek eus

Okitania pe broioù all, da zaremprediñ an divizoù gant ar Ministrerezh ur pennadig amzer zo. Evit ar poent, eo deuet dileuridi ar skolioù euskarek Seaska en-dro d'an daol adarre, a-gevret gant ar Vretoned, evit " kaozeal " hepken ha n'eo ket evit " ober emglev ", eme rener Seaska, Estebe Eyherabide. War kraf an tuta skolaerien e ra ar Ministrerezh kinnigoù a c'hellfe reiñ an tu da vont war-raok. Ar skolioù all evel ar c'h-Calandreta, eus Okitania, a chom e diavaez an divizoù koulskoude, ha goulenn a reont e vefe anavezet da gentañ gant ar Stad o " servij publik " a skolioù okitanek.

Eus tu Diwan e talc'her da zivizout gant an Deskadurezh Stad. Evit ar poent koulskoude e chom re bell kinnigoù ar Ministrerezh diouzh goulennoù ar skolioù brezhonek evit ma c'hellfed ober emglev diouzhtu. Se eo a lakae tud burev Diwan Breizh da zisklêriañ en ur gemennadenn e dibenn miz Mezheven e oant " *nec'het* " gant dale ar Ministrerezh hag e oant " *o c'hortoz* " e rafe ar gouarnamant " *ur c'hammed war-raok da vat* ".  
I.K.

